

Sòn ar Pilhaouaer

EUR ZON GOZ

Allegretto.

Ma - ri - vo - nik zo di - me - zet gant eur
c'hoz tam pilh-aou-aer gant eur c'hoz tam pilh-aou-aer. E Lo -
ke - fret e zeo ga-net e kom - ma - nant Toul al Laër. Foei foei
foei va za - mik ao - trou gant e stoub hag e bil-hou.

DISKAN

Foei, foei, foëi
Va zamik aotrou
Gant e stoub
Hag e bilhou! (*bis*)

1

Marivonik 'zo dimezet
Gant eur c'hoz tam pilhaouer (*bis*)
E Locqueffret e zeo ganet
E Komanant Toul al Laër.

2

Antronoz dervez an eured
E oa foar e Landerne (*bis*)
Ha va lapouz prim dihunet
Dao er meaz euz e vele.

3

Drailha ra eun anter-pater
Tâna ra e gorn butun (*bis*)
Hag en hent gant e grog-poezer
Da bourmen hed ar zizun.

4

Hed ar bloaz kenkoulz lavaret
'Vez atao o redet bro (*bis*)
Hag e lez e c'hreg glac'haret
Er gear da skuilha daero.

5

Pa vez echuet e droiou
'Teu d'ar gear atao mez' dall (*bis*)
Darb' oa dezan koll he vragou
E Landerne en deiz all.

6

Pa deuo lezen er vro-ma
Da derri an eurejou (*bis*)
Monik a zaï en eur gana,
Peil diouz pôtrede ar pillhou.

7

Pa deuo karrik an Ankou
D'ober trouz dre ar vro man (*bis*)
Monik a zaï var e roudou
Hag er pedo d'e zamma.

8

Pa vo maro e zam aotrou
Ha lipet ganta e loa (*bis*)
Monik e leac'h lezer klemmou
A gano : « d'an toul e za ».